

DEIZ A VLOAS

AN AUTROU AN DUC D'ORLEANS.

1843.

Eur blos a zo dija!... O deiz quer glac'harus!

O trizec a Vouere, devez meurbet eùzus!

E pini e teujout, gant ar brassa counnar,

Da ziscar hor Prinç mad, Maro cris ha barbar!...

Eur Prinç, joa ar Franç oll, hac a voa quer caret!

Qement den zo en Franç a gar en lavaret.

Quer mad, qen douç e voa! Sönjomp atao ennän,

Evel güir Francisién, qeit' ma vimp er bed-màn.

C'houi, dreist oll, soudarded, a garrie 'vel breudeur:

Beza ganêc'h a voa evitân e voneur.

Plijadur a zante o veza en ho touez.

Peguer joaüs e voac'h, p'ellec'h clèvet e vouez!

Conservomp en hor c'hreiz e peb amzer memor

Demeus eur Prinç quer mad ha scoüer eus an enor.

Oh ! na pebes maleur ha pebes quer bras coll !
 Eur prinç a voa caret gant ar Francisien oll !
 Eur mignon hac un tad hon eus collet ennà ;
 Stoùomp d'urzou Doue : emâ en ên bremàn ,
 O pedi calonec ar C'hrouer souveren
 Da scuill' e vadelez var an oll Francisien.
 Ah ! credomp oll penos pedennou quer santel
 A vezo exaucet a bers an Eternel.

Beillit atao varnomp , ô Prinç qement queziet !
 Ho memor da vijen en Franc vo beniguet.
 Evit ma vezimp dign eus ar Prinç a gueuzomp ,
 Evel güir Francisien , oll en em unanomp .
 Caromp , ni , Bretonet , a galon hor mam-bro :
 Bezomp dezi fidèl atao bete'r maro.

Un never sacr hon eus da renta oll bremâ ,
 Da yemor ar Prinç mad hon eus collet zo blosa .
 Ar bêvar a vis Eost , e tezir ar Roue
 En em rentfemp en caòn ebars e templ Doue ,
 Gant devotion vrás hac eur feiz calounec ,
 Da bedi gant fervor hor Mestr oll-galloudec ,
 Evit repos ene an Duc a Orleans ,
 Anlevet , eur bloas zo , da garantez ar Franc .

D'an dezir quer just-se , qen tenerus d'un tad ,
En em ampressomp oll demeus a galon vad
D'en em renta hep manq en deiz-se en ilis ,
Ha gant devotion d'asista en ofic.
Dirac an tabernacl , eno neuze rentet ,
Pedomp vit ar Prinç mad , allas ! hon eus collet ;
Pedomp evit e c'hoar , ur princes voa quer mad !
Collet evit ar Franç , gant quer bras calonad !

Imploromp a galon misericord Doue
Evit ar Rouanez hac evit ar Roue ,
Evit o oll famill ; ha graç d'ar Brovidanç
Da laqat rën atao an union en Franç !

